

**Maria Prat : Diou hoar da choaz**

### C'hoarierien

**Marivon** : ar vatez koz

**Annaig ha Janed** : diou hoar yaouank.

**Daou den yaouank**

**Marivon**

(*O feri*)

**Annaig**

(*A deu gand bleuniou*). Comment, Marivonne, vous n'avez pas encore repassé cette nappe? Mais dépêchez-vous donc.

**Marivon**

'H on gand se, 'h on gand se, med n'on ket kap da vond buannoh. N'on ket pemp bloaz warn-ugent ken, ha ma klaskan mond re vuan eo peurjogañ anezi eo a rin.

**Annaig**

Enfin, je vous demande de préparer vite la table. Voci des fleurs et un vase pour les mettre. Puis avec ce ruban vous ferez dessus une cocarde parce que vous savez qui j'attends. (*Azezañ a ra da fumi*).

**Marivon**

Kijatañ! Petra eo ze?

**Annaig**

Ah! pauvre vieille Bretonne, je ne pourrai jamais vous mettre à la page.

**Marivon**

Petra? n'oh ket kap da lakaad ahanon "alapaj"? Na lakaad ahanon "alaport". N'houlet ket ober ive rag kerse vefe ganeoh ma vefen ket oh ober ar labour amañ, o sikour ho c'hoar. Neuze n'e-pije ket kement a amzer da 'n em stripañ na da lakaad an tan war ho putun.

Med da vihannañ, ekspliket din en brezoneg, ha neuze komprenin. N'eo ket hennez eo langaj on bro. Petra 'hoari d'ar beg sukret-mañ?

**Annaig**

Eh bien... laret 'm oa deoh penaor em oa dañset disul gand eun Iñjenieur yaouank deuz ar C.N.E.T., Sous-Directeur er labortoar. Ze zo greet aze en Berlewane.

**Marivon**

Me zo 'vel-se amañ ive. Sous... Sous-maîtresse.

**Annaig**

Heu! C'est un beau gars, et calé! Autrement que vous, et quelle instruction! Il fait même des vers.

**Marivon**

Petra 'peus kavet aze? Ma! diganeoh!

**Annaig**

'Hanta, bremañ zouden e welfet eur paotr pegen chik eo pegwir nevoa laret din : « A dimanche! » e teuio sur da gerhed ahanon da vond d'ar bal emberr d'ar "Horn mad".

**Marivon**

Ma oa bet mad ar gaoz ganeoh ha ma 'nevoa regalet, paeet 'nevoa deoh eun toullad berliñgo?

**Annaig**

Ah! ça, c'est du passé et non pas du présent. Me eo am-oa paeet dezañ eun aperitif hag eur zigaretenn. De temps à autre. N'eo ket moarvad ma hoar! Ar paour-kêz Françoise ne gavo biken da dimezi. Greet 'nevoa eun dañs bennag ganti ive, med sur ne raio ket ken pa 'n em desale ket. 'Devoa ket bet memez la présence d'esprit da baeañ dezañ eur bok.

**Marivon**

Petra da baeañ eur pok? Ar pokou avad, vent ket paeet, hag evel-se ne vo ket a digarez da ober goap diouti, ha diouzoh marteze vo. Gwechall pa oan yaouank, vije ket regalet ar ganfarded ive. Ind eo a renke ober, ha c'hoaz vijent tapet da dougen ar paraplu.

**Annaig**

Bon, mais c'est pas le tout, la table ne va pas être prête et M. Robert va arriver.

**Marivon**

Piou eo hennez?

**Annaig**

Med ma hamarad sur, l'Ingénieur. A ya, Marivon, en deiziou all, pa vin dimezet da hennez, 'h et da weled ahanon o lared adieu d'ar labour. Adieu d'am hoar ha d'he saout.

**Marivon**

Hag o lared adieu la France, me 'h a da Wengamp.

**Annaig**

Non, pas Guingamp. J'habiterai un beau chalet dans le grand Lannion.  
J'aurai une voiture pour...

**Marivon**

Hañ, ya, eun otomobil da vond da, da loin... loin.

**Ananig**

Avec ça, j'aurai une bonne eveldoh, plus moderne que vous pour faire mes chambres et pour servir à table.

**Marivon**

Une bonne plus moderne que moi? Hañ ya, da vond gand eun davañjer gwenn da gas da "Madame" ha da "Monsieur" la croûte à casser après manger.

**Annaig**

(*O sevel*). Mais enfin, cette fois-ci, je crois que vous voulez vous moquer de ma personne.

**Marivon**

Non, damen 'vad, je ne fais pas la moque à vous.

**Annaig**

Bon, n'importe. En attendant mon cher Robert, je vais jusqu'au bourg chercher un paquet de Gitanes.

**Marivon**

Petra eo se?

**Annaig**

Setu aze. Piou eo hennez? Petra eo ze? N'anvezet ket butun deuz chikore. Med da vihannañ, gret ar pez ah an da lared deoh. Chilaouet ervad.

Laket war an daol an napienn, eur podad fleur gand eur gokardenn, eur voestad gatoiou, eur voutaillad gwin fin, ha peb a werenn. Komprenet 'peus?

**Marivon**

Ya, ya.

**Ananig**

Repetet 'ta neuze.

**Marivon**

Repeti petra?

**Annaig**

Ar pez 'm-eus laret deoh.

**Marivon**

Med me 'm-eus ankouaet. An dra-mañ zo charre ganti. Me 'm-eus ket eur beg da repeti evel-se.

**Annaig**

Quelle tête de Bretonne! Pa n'oh 'vid deski mann all 'bed, ma vijeh kap da nebeutañ da deski kaozeal! Bremañ zouden, pa'h arruo M. Robert, e houllo diganeoh : « Est-ce que Mademoiselle Annaig est visible? », n'et ket da lavared dezañ : « Elle n'est pas à la maison » avec votre accent breton. Bon, sur ce, je vous laisse. débrouillez-vous. (*Mond a ra er-mêz*).

**Marivon**

Hañ, ze avad a zo êzet da lared. gwelom 'ta neuze, pe debrouillañ pe varbouillañ a rin. Arsa, penaoz zo laret din? Hañ, ya, lakaad an niñsel war an daol.

**Janed**

(*O tond er zal*). Peleh eo eet ma hoar adarre? N'eo ket deut da zikour ahanon da horo ar zaout na da rei o hoan d'ar loened.

**Marivon**

Ho c'hoar, plah paour, a zo eet, me gred, da glask da lahañ an hini 'n-eis ivantet ar labour. Gand ar hi braz, rag laret 'deus din e oa o vond da gerhed Jitan.

**Janed**

Petra da gerhed Jitan? Hañ, neuze, eo eet da gerhed butun, ha c'hwi hopeus komprenet e oa eet da gerhed ar hi. Evel just emañ in-zell da dond d'ar bal, da fumi ha da rei butun d'ar baotred yaouank. Me zo o soñjal mond ive, med ne rin ket evelti.

Eh an da lakaad ma dillac da zul, rag unan bennag a dle dond da gerhed ahanon. C'hwi, Marivon, a lakeo an daol prop da hortoz. (*Mond a ra er-mêz*).

**Marivon**

'H on gand se, 'h on gand se.

Med peleh oan arru gand ma labour? 'M-eus aon 'h on 'n em varbouillet dija. Hañ ya : lakaad eur podad fleur war an daol, eme eben, hag ober warnañ eur gokardenn; sur, ma karje bezañ greet heh-unan, n'eo ket

moarvad lakaad ar seurt din-me d'ober kokardennou. Añfin, êseom bepred...

Mad... Ouesk a-walh pa laran da vezañ lakeet dirag n'eus forz piou na pa vefe dirag Prezidant ar Republik. Ha bremañ, gwestell, eur voutaillad gwin fin, ha peb a werenn. Moarvad da drinkañ?

**Robert**

(*O tond er zal*). Bonsoir, madame.

**Marivon**

Bonsoir, Monsieur. C'est vous M. Robert?

**Robert**

Oui, c'est moi.

**Marivon**

C'est que Annaig m'a dit de ne pas vous dire qu'elle n'est pas à la maison avec mon accent breton.

**Robert**

Je n'ai pas bien saisi. Ma lavarfeh din e brezoneg!

**Marivon**

Penaoz, Aotrou yaouank, c'hwi oar brezoneg?

**Robert**

'Vel just, pa'h on euz Lannuon.

**Marivon**

Ha me euz Landreger. Azezet avad, ma refom eun tamm kaoz.

Ma! ma! Daoust deoh da vezañ Iñjenieur pe n'on ket petra, n'eo ket fae 'velkent ganeoh komz yez on zadou.

**Robert**

Diskiant 'vefen avad ober fae war yez ma bro, rag ar brezoneg , 'n-eus ket harzet ahanon da deski kalz a dreou.

**Marivon**

Ya, hervez kleved eh ouzoh ober eun tamm a beb seurt, beteg ober preñved.

**Robert**

O Doue? Petra? petra 'peus klevet?

**Marivon**

Fedamdoulle 'vad, Annaig heh-unan a zo o paouez lared se din.

**Robert**

Med marteze e reeh kaoz e galleg?

**Marivon**

'Vel just avad, an dimezell-ze a gav dezi pa vo o chaokad galleg a vez eun dra bennag dreist an dud all.

**Robert**

Ya, med "faire des vers" hag "ober preñved", n'eo ket ar memez tra.

**Marivon**

N'eo ket memez tra? Me gave din koulskoude e oan koz a-walh da houd petra lerent, med bepred ar pez zo sur e kouezet mad rag Annaig a zo eet da gerhed butun ha bremañ zouden e-po diganti danvez eur hornedad rag plijoud a ra dezi regali.

**Robert**

Ya, eun tamm re, med me n'am-eus ezomm 'bed na deuz he butun na diouti, rag n'em-eus ket a hoant da gaoud eur wreg hag a vo etre trinkañ, 'n em stipañ ha klask tan da fumi.

**Marivon**

Petra? N'ho-peus ket ezomm diouti? Hag eñ, emezi, e-noa laret "à dimanche" dezi ha dañset ganti. Ha ze zo kaoz he-deus laret din lakaad treou mad war an daol 'benn arrujoh. Sellet : gwestell ha treou. Ha n'oh ket arru da gerhad anezi?

**Robert**

Nann sur avad, ya, da gerhad he c'hoar Janed.Ma! 'm-oa laret "à dimanche" d'eben ah eo evid kas anezi kuit ha ma 'm-oa greet eun dañs ganti, ah eo 'vid paz rei eur habestr dezi, rag gand an taol-lagad kentañ em-oa gwelet pehini euz an diou hoar he-devoa ar muiañ a dalvoudegez.

**Marivon**

Sellet 'ta, ne ouzeven ket c'hoaz petra e oa eun Injenieur, med a-hervez, c'hwi eo ho labour mond evel-se d'an dañsou da weled petore merhed o-defe ar muiañ a dalvoudegez. Er gont-se, oh barreg da rentañ servij d'ar ganfarded 'n eur lared deze. Klev 'ta, paotr, hounnez zo welloh 'vid eben.

**Robert**

Hopala, gortozit avad. Me n'eo ket ze ma labour. War ar poent-se, pep hini zo d'ober e choaz. Ha waz 'vid an hini a 'n em dromplio, gand ar gondision 'n em dromplin ket ma-unan.

Med, n'eo ket ze. C'hoant 'mije da gleved hag-eñ n'emañ ket Janed er gêr, rag deut oan da glask anezi.

**Marivon**

Geo avad, emañ o paouez achui deuz he loened. Eh an da lared dezi hastañ buan tennañ he dillad labour ha 'n em lakaad faro, e zo arru eun Aotrou da glask anezi. (*Mond a ra er-mêz*).

**Robert**

O! klevet 'ta, an dillad labour eo an dillad faroañ hag ar muiañenorabl, rag ar re a uz dillad labour eo a zo o kas ar bed en-dro hag o sikour an dud all da vevañ.

Ma! Ma! da hortoz se, n'on ket kap da harz da darluched deuz ar podad fleur-mañ. (*O kregi ennañ*). Pa laran, setu aze hag a zo touped. Daoust piou 'n-eus teket hennez? N'eo ket moarvad Janed, peotramant eo arabad din soñjal lakaad eur walenn dezi war he biz, rag kement ha kemer eur wreg, em-efe c'hoant da gaoud unan hag a ouife ober eun tamm a beb seurt. Mad kaer eo gouvezoud ober ouz ar loened ha lakaad lard ar zaout, med, da heul ze, eo mad ive gouvezoud kempenn an treou 'barz en ti ha lakaad eun tamm fleur war an daol, eun tamm oueskoh 'vid hemañ.

**Janed**

(*O tond en ti*).

**Robert**

(*O sevel*). A! demad, Dimezell Janed. (*O vond da stardañ dezi an dorn*).

**Janed**

Demad, Aotrou Robert.

**Robert**

Mond mad ra an treou abaoe disul?

**Janed**

Deuz ar hentañ, ya.

**Robert**

Iskuzet ahanon, 'n em ankouaet e oan da zelled ouz ar podad fleur-mañ, rag kaoud a ran anezañ eun tamm...

**Janed**

O! Ma Doue, sellet 'ta penaoz eo pakotet hemañ. 'Michañs eo ar vatez koz Marivon a zo eur plah vad, med n'eo ket kustum d'ober deuz fleur.

**Robert**

Ya, 'vad, plah fentuz eo ive bepred. Lared ra an treou 'vel e teuont.

**Janed**

Ha lakeet he-deus treou mad war an daol, daoust petore soñj a zo deut dezi? Azezet 'ta! Koulskoude n'em-oa ket laret dezi piou a oa d'arruoud.

**Robert**

Nann, med ho c'hoar, hervez, 'devoa laret dezi e oa o hortoz ahanon o vezañ 'm-oa laret dezi "à dimanche".

**Janed**

Petra, ma hoar? Ha n'he-deus ket laret din! Hañ, ze zo kaoz eo eet adarre da gerhed butun, med pa'h arruo, me 'h a da vezañ digreouet ganti.

**Robert**

Ar pez meum d'ober ma oh prest eo karzañ a-raog vo arru.

**Janed**

Prest? Geo avad, med azezet eur pennadig memez tra, rag red eo dim tañva ar gwestell hag ar voutaillad treo. (*Distouvañ ha diskenn a ra anezi*).

**Robert**

Setu-me leuriet, m'emañ Annaig o klask 'n em begañ ouzin. Ma 'mije gouvezet, pa oa deut da glask ahanon da dañsal, em-iye roet eur hrabestr dezi. Pa 'devoa ofret din eur zigaretenn, 'mije laret ne ouvezen nemed chiked ha pa oa deut da baeañ eun aperitif din, bezañ laret dezi e oan e "régime lacté", ha neuze ne vije ket bet 'n em zorhennet, rag ne blij ket din ober goap ouz den ebed.

**Janed**

(*O kinnig ar gwestell*). He faot eo, ma vez greet goap outi, med despet 'm-eus memez tra rag ma hoar eo.

**Robert**

Trinkom bepred ma'h efom d'an abadenn.

**Marivon**

(*O tond*). Yehed mad deoh, tud yaouank.

**An daou den yaouank**

Ha deoh ive, Marivon!

**Janed**

Kermeret eur wastellenn ive eveldom.

**Marivon**

(*O kemer unan*). Trugarez. Chomet e oan da zelled ouz ho kwetur en

toull an nor aze. Bezañ ho-peus unan vrao. Petra vez greet ouz hounnez, eun "tachons avant"?

### **Robert**

Eun "Traction avant"? N'eo ket, houmañ zo eun "I.D."

### **Marivon**

Petra? Eun ide?

Eun ide vad eo neuze 'michañs. C'hwi, me gred, ho-peus kalz ideoù mad. O tond da glask ar plah yaouank-mañ n'ho-peus ket ive eun ide fall, rag homañ a zo eur labourerez hag eur plah fur. hag a virit kaoud unan ken mad. 'Michañs ho-peus eun ti ive ken brao hag ho kwetur?

### **Robert**

Bezañ am-mo avad evid an deiziou rag etre Lannuon hag ar C.N.E.T. e ver o sevel tiez brao evid an Iñjenieurien. Ha pa vo achu ma hini, mar keret, e teufet da vatez ganin. Nim a raio kaoz kaer en brezoneg.

### **Marivon**

Mad eo din avad chom en bro-Lannuon da heul Janed amañ; gand he c'hoar avad ne chomin ket, pa ne glask nemed skei ar beh war gein an dud all.

### **Robert**

Er gont-se neuze, a-raog ma vo arru da skei ar beh war ma chouk eo ar hentañ gwellañ dim mond gand on hent. Arru oh, Janed? (*O kregi 'n he dorn*). Kenavo bremañ zouden.

### **Marivon**

Kenavo 'ta, bugale, plijadur vad deoh. 'Vet ket re bell oh ober ho tro. Gwechall vije laret d'ar reou yaouank bezañ arru er gêr 'benn ma sone an añjeluz.

### **Janed**

Ada! Marivon, laket ar hafe prest 'benn ma tistrofom. Ha ma 'pez amzer, greet eun toullad krampouez gwiniz. (*Mond a reont er-mêz*).

### **Marivon**

(*Heh-unan*). Ma feiz, biskoaz kemend-all memez tra. Setu amañ eun taol arruet. Bremañ-zouden pa arruo eben, eh a d'ober kastrillez, barreg da damall ahanon c'hoaz.

### **Soazig**

(*Oh arruoud*). Salud! salud! Tapet eo koan?

**Marivon**

Ya, zur, den yaouank.

**Soazig**

Me zo arru da glask ar verh ahann da vond da dañsal d'ar "Horn mad".

**Marivon**

Sellet 'ta! Laret vez din e laran an treou, med c'hwi 'm-eus aon n'oh ket eur paotr da glask tro ive?

**Soazig**

Nann avad, me 'n em lak êzet gand an dud. Me 'h a da azezañ.

Med peleh emañ Janed?

**Marivon**

Gand Janed ho-peus greet intentamant?

**Soazig**

Hañ, me ran ket intentamant gand an dud en avañs 'vel-se. Med ma zad 'n-eus laret din klask unan vad da wreg. Setu pa zo amañ diou hoar da choaz, em-eus c'hoant da choaz an hini wellañ.

**Marivon**

Ya, med, ma faotr, pa vez c'hoant da gad ar choaz e vez ezomm da vond abred d'ar marhad, ha c'hwi, me gred, a zo tapet war-lerh. Janed a zo bet eun aotrou o kerhed anezi gand eun otomobil vrao. C'hwi 'peus eun otomobil ive?

**Soazig**

'M-eus ket 'vad, med eur betaillerenn, hag evel-se ma zo eet unan euz ar merhed gand eun all en otomobil me 'mije kemeret an hini vije manet, rag me n'on ket eur paotr tener.

**Marivon**

N'oh ket eur paotr tener? Ze a gredfen a-walh. Med amañ zo unan hag a zo. Ha me gred penaoz 'h a d'ober eur begou... Añfin eet eo da gerhad butun. Bremañ-zouden pa vo distro e klevfet ganti.

**Soazig**

Petra eo eet da gerhed butun? Well a ze. Neuze 'mo eur zigaretenn ganti, med da hortoz 'mije evet eur bannah treo a-walh, rag me 'm-eus tapet tomm hirie o tennañ peziou beterabez ken prest a-walh 'mije renket ober eun troh halpont enne a-raog skei aneze er harr. Ze zo kaoz 'm-eus sehed, ha neuze gavfet ket 'm-eus feson loue o chom da zelled pa zo treou

diragon war an daol?

### **Annaig**

(*O tond*). Comment, Marivone, il n'est pas encore là, mon Ingénieur?

### **Marivon**

Geo 'vad, sell-hañ aze 'n e goavez.

### **Soazig**

(*O 'n em gemer*). Hañ! gortozit avad. Me 'm-eus biskoaz laret deoh e oan bet iñjenieur. Me 'm-eus ket a hoant da vezañ kemeret 'vid ar pez n'on ket.

### **Annaig**

Sellet 'ta piou a zo amañ 'n e goavez. Soazig, plouz-e-votou: ha petra 'teus ket a hoant da vezañ kemeret 'vid eun Iñjenieur? Certainement pas. Il n'en a pas cette allure-là. Rien que de voir comment qu'il est chapeauté. Med ar pez 'mije c'hoant da houd. Petra eo da gomision?

### **Soazig**

Feiz sur, me zo o klask eur plah yaouank da vond d'ar bal ha peogwir on tapet war-lerh, eo red din ober gand restajou. Evuruzamant n'on ket difisil. Deut ganin, 'm-eus otomibil 'bed da vond da vale, med eur betaillerenn 'm-eus.

### **Annaig**

De quoi? de quoi? Mond ganit d'ar bal? Fallait que ça, avad. Kerz da glask ma hoar ma kerez gand da wetur da lakaad saout. Eno vefe 'n he jeu peogwir e plij dezi bezañ en-mesk ar loened hag o kaozeal brezoneg gand paotred diwar ar mêz.

Me zo o vond gand ma Iñjenieur. Hennez a gaoze galleg.

Med penaoz, Marivon, piou zo bet aze abaoe? Gweled a ran roud eun oto 'barz er porz.

### **Marivon**

Piou zo bet aze? Plah paour, 'h et da gleved. C'hwi oa 'n em dromplet. M. Robert 'nevoa laret "à dimanche" deoh 'vid difoarañ ouzoh, hag ah eo gand ho c'hoar 'h eo bet o kerhed anezi ha n'eus ket ezomm, emezañ, na diouzoh na deuz ho putun.

### **Annaig**

(*O kouezan war eur gador*). Ah! malheur de malheur! Mil malloz ruz war Iñjenieurien! Biken ken ne regalin aotrounez. (*Gouelañ a ra, he fenn etre he daouarn*).

### **Soazig**

C'hoaz a leret! Mad 'm-eus greet paz mond da aotrou.

### **Marivon**

Ya, marteze 'benn ar fin, e tapo ganeoh, rag an dimezell-mañ ne dalho ket da vezañ ken faeüz-se hag a renko lakaad dour 'n he gwin.

### **Soazig**

Ha posUBL e lakefe dour 'n he gwin beteg ne lakeo ket 'n em hini.

### **Marivon**

Med dalhit ket da harmad war digarez eo eet egile gand eben. N'eus ken bremañ med mond eben all gand egile all. Soazig amañ marteze a oar dañsal ive.

### **Soazig**

(*O sevel evel eun tenn*). O ya 'vad. Sellet an twist hag ar jabadao ha n'eus forz petra! (*O kregi 'n he dorn*). Deus ganin. Sell hag e weli, ha disadorn da noz 'h efom d'ar veilladeg.

### **Annaig**

Ma! sellet! War eun taol-penn 'vel-henn e rafen n'eus forz petra. Kement ha diskwel deze 'm-eus kat eun all dustu, eh an ganit. Med memez tra, tenn da dok pe dres 'nezañ oueskoh 'vid se.

### **Soazig**

Dresañ ma zok? Hañ ya 'vad, med eur bannah treou 'mo c'hoant da gad neuze.

### **Marivon**

Hag az-to, sell! war ar marhad! Me 'h a da diskenn dit.  
Diwar hennez me zo sur az-to nerz da dañsal.

### **Soazig**

(*Oh evañ*). Gwir a leret avad. Hu! Kokot bremañ ! (*O kregi en breh Annaig*). Dem dezi, Annaig! Med petra zo kaoz ne rez ket eur hoarzadenn vihan ive? Eur hras kaer 'vel 'h eo dit dont kaoud ahanon.

### **Annaig**

Eur hras eo, med n'eo ket unan kaer. Pa zoñjan war biou 'h on ratet ha gand piou on kouezet! Kenavo emberr Marivon. (*Mond a reont er-mêz*).

### **Marivon**

Hañ! ya 'vad. sellet war biou eo kouezet an dimezell! War Soazig plouz-e-votou. Aze eo tapet oh ober goap ouz he c'hoar hag a zo welloh eviti.

N'eo ket mad ober fae na goap ouz den ebed rag laret vez penaoz an neb a 'n em uhella a vez izelleet.

Miz du 1962